
AR
RENTADEK NEUD.

War don : *Er Finister me a zo ganed....*

C'hoand am euz da gaoud eur wiaden,
Ha gouzout neza ne rann ket ;
Rag me a zo, vel eur verc'hoden,
Didalvez, blang ha divorc'het.

DISKAN : *Ma c'hoarik baour, didostaet,*
C'hastit buhan, me zo nec'het;
Freged eo ma niseliou,
Anter uz ma broziou. Diou weach.

— Eul liorzik leun choug a ganab,
Hag eur park braz karged a lin,
A raio dillad ouz ann dibab,
Rag se, Joben, bezit lirzin.

DISKAN : *Me zo iveau toull malerou,*
Ma broz da zul ha ma botou;
Ma goaz a zo druillennek
Ha me zo pillaquek. Diou weach.

Me zo, siouaz ! pell zo intlanvez,
Ma bugalez zo demezet :
Red eo d'in kaout mevel ha matez,
Jervijet fall ec'h oun bepred. *Ma c'hoarik paour,...*

Me ma unan, ebarz ma lochen,
Pa vez ma goaz o labourat,
A gar, ma c'has gwenn war ma barleu,
Staga tammou war ma dillad. *Me zo izez....*

— Me a renk pedi ma mitijen,
D'ober kouez war ma zraou louz;
Hag e leverond d'in, luduen,
C'houi ra ann anter re a drouz. *Ma choarik ...*

Ma hellse Pipi gounid arc'hant,
Me brense lanvez a verniou ;
Ha war ma c'har, c'hoaz laouen ha drant,
Me nezse moan ma neudennou. *Me zo izez....*

— Ho Pipi, gand eiz gwennek bemdez,
N'hello biken gounit trewalc'h ;
Rag evit prena berniou lanvez
E renk beza pouner ar ialc'h. *Ma c'hoarik....*

Nann, Pipi geaz hag hen daoubleget,
O poania stard e pad ann deiz,
Eunn tamm butun, p'en deve prenet,
Ne choumi netra gan-in, paour keiz. *Me zo izez....*

— Ma karit c'hoennad ma c'hanabek,
Ma farkad lin, Fanchonik koz,
Me roio d'eoc'h, gand ann Nedelek,
Danvez lien ha meur a vroz. *Ma choarik....*

A greiz kaloun e rinn kement-se,
Trugarez d'eoc'h, ma c'hoar Joben,
Ho c'has d'ann dour da eogi izez.
Ma hellfenn ober e rafenn. *Me zo izez....*

— Pa vez lin daro er parkou
Ha kanab hir er c'hanabek,
E vo braeiou ha paluc'hennou,
Ha kribinou d'ho c'hribat c'houek. *Mo c'hoarik....*

Neuze ives ar iaouankizou
A c'houlenno cunn tamm didu ;
Rag setu koulz ar rentadegou,
Evel gwechall ; sonj oc'h eus-hu ? *Me zo ives....*

— Gwir a leverid, amezegez,
Gwechall goz enn hon iaouankiz,
E oa enored ann nezerez,
Hag ar baotred he zelle piz. *Ma c'hoarik....*

Me a raio, pa mo ma danvez,
Eur rentadek ouz ar gaera ;
Ar merc'hed iaouank, gant karantez,
A nezo flour enn eur gana. *Me zo ives....*

— Ia, Fanchonik, grid eur rentadek
Hag o pezo neud da steui ;
Ar gwiader a gavo abek
Gand he varc'h koad da vond d'ho ti. *Ma c'hoarik....*

Ne ked awalc'h rei lin da neza,
Ober eur fest zo red ives,
Ha rei da zibri ha da eva
D'ann neb a ra neud gant lanvez. *Me zo ives....*

Ha setu bet al lin o sec'ha,
Prened ar vrae, ar baluc'hen ;
Ar c'hribinou kased da stoupa,
Ha polizi leiz ar varlen.

DISKAN : *Paotred iaouank, paotret lirzin,
Diredid holl da gerc'het lin ;
Kasit-han d'ho maestrezed,
Gant hasd e vo nezed.* Diou weach.

Hag ec'h a Iouen, Fanch ha Jakez,
D'ar meleriou tro war zro,
Ha gant-ho godelladou lanvez,
D'ar merc'hed iaouank ind ho ro.

DISKAN : *Hag e taper ar c'har neza
Diwar ann arc'h et leac'h ma ioa ;
Ha war ar rod ar gorden,
Er werzid ann neuden.* Diou weach.

Ouz ho c'hostez kleiz ar stagelen,
Hag ar gegel koant rubanet,
E chasond hag e troont pergen,
Kar ar vamm goz a zo nec'het. *Hag e taper....*

Ha war ann traouil he c'houec'h kuden,
Godik a c'hoarz ker brao ha tra ;
Evel he bleo eo moan he neuden ;
D'ezhi e vo ar priz kenta.

DISKAN : *E ti Fanchon, dimeurz kenta,
E vo ar fest gant kalz a joa,
Eno e vo evajou,
Ha boed mad d'ar genou.* Diou weach.

Setu ar c'hudennou rodellet
Ila war bep hini eur rozen ;
E mant er baner vraz lerennet
Gand eur voutaill hag eur weren. *Et ti Fanchon....*

D'ann hostaleri, dre ar parkou.
Ec'h a gand he sevar real,
Ha gwin-ardant er voutail c'houllou
A vez diskennet rak-tal. *E ti Fanchon....*

Eul lipaden digand ann hostiz
A vez d'ezhi kinniget.
Hag e c'hast buhan astenn be biz
Gan dann aoun da veza gwelet *E ti Fanchon....*

Ru he fenn evel eur gokarden,
Aweled evel eur iar vco.
Ha, rannet gant-hi he bleo melen.
Ec'h a d'ar ret a dreuz ar reo. *E ti Fanchon....*

Ha, diout-hi eur pez kaillaren,
Ann diveza ec'h erruo;
Naonteg all a zo e ti louen
O c'hortoz anezhi pell zo. *E ti Fanchon....*

Ha d'ann ti pri ec'h a ar bagad
ENN eur gana : tra la la la,
Seder ho beg ha lemm ho lagad,
Ec'h eond holl enn eur gana :

DISKAN : *E ti Fanchon hirio eta*
E ma ar fest gant kalz a joa;
Eno e zo evajou,
Ha boed mad d'ar genou. Diou weach.

E loch-kar Gwillou eunn daol savet,
Gand eur skeul hir ha koz plenken,
E dro d'ezhi paotred ha merc'hed
A chas didrouz war ar souben. *E ti Fanchon....*

Pemp anduillen ha sez gwadegen,
Eur joten bore'hel hag eur c'had
A zo digased er chaoudouren,
Gant patatez ha loaiou koad. *E ti Fanchon....*

Ann holl verc'hed a ia d'ho saner
Hag a dap gwin ha gwin-ardant ;
Ar skudellou, ar gwer a stoker
Hag ec'h ever laouen ho drant. *E ti Fanchon....*

Dindan eunn darbod, war ann trebe,
Fanchonik koz, gant kalz a stad,
A ra tan sklear, gant plouz he gwele,
Da ober d'he zud kafe mad. *E ti Fanchon....*

Pipi-ludu, o tivogeda,
A gaser tomm ruz war ann daol,
Hag evid ober d'ezhan iena
ENN *hini-kre* e krog an holl. *E ti Fanchon....*

Goude ma oe ann daol dieubet
E tispakaz ar c'hudennou ;
Rag, kent evit beza meo kollet,
Ne vez ket fall rei ar prijou. *E ti Fanchon....*

Da C'hodik ec'h eo ar mouchouer
Ha da Iouen ar gravaten ;
Ha war boez ar penn e leverer,
Ouz ho lakaad enn ho c'herc'hen :

DISKAN : *Nezed e deuz chouec'h kuden voan,*
Hag uguent plac'h zo gand unan ;
Enor eta da Iouen
Ha da C'hodik laouen. Diou weach.

War gourn ar c'hleuz e ma ar zoner,
Il a setu krog ar jabadao ;
Il a potr ha plac'h e dro e troer
Gand eur boan vraz o choumm er zao.

DISKAN : *Plijadur zo enn abaden*
Pa vez saved ar gwin d'ar penn;
Eno e lamper huel
Dirag ann neb a sell. Diou weach.

Ann heol a ia d'he doull kouskoude ;
Red eo troc'ha ar c'hoari gaer,
Ha mont war zu ar gear adarre....
Ar vamm a grozo c'hoaz emberr! *Plijadur zo....*

Hag ar persoun, ouz krec'h ar gador,
Disul marvad a lavaro
N'ho deuz ket bet nemeur a enor
Ann dud iaouank a ioa eno. *Plijadur zo....*

Da noz kouskoude e sao eur gann
E tre ar baotred, ar merc'hed ;
Anez ann dra ze, war a welann,
Ne vez netra great mad ebet.

DISKAN : *Taol dourn aman, taol dourn du-hont,*
War ho fenn toull holl e kouezont;
Darn ebarz er chaoudouren
Ha darn all er souben. Diou weach.

E deiz wərlec'h, blounsed a daoliou,
Dirag ar mear, mezek, pikouz,
Ec'h eont da ober ho c'hlemmou
Hag e reont c'hoaz kalz a drouz. *Taol dourn....*

— o —

C'houi merc' hed iaouank, merc' hed kristen,
Selaoud holl eunn ali mad :
« Enn hostaleri ne d'it biken,
Ha grit enor d'ho mamm d'ho tad. »

DISKAN DIVEZA : *Dilezid ar rentadegou.*

*Ann hostizien, ho bannac'hou,
Ha karet gand ann holl dud,
N'ho po ked a well vrud. Diou weach.*

J.-M. AR IANN.

**Ar ganaouen man a gaver e Gwengamp, e
ti ann oberer, tosd da vare'had ar pesked
ha d'ar butun braz.**

P. AR GOFFIC, mouller Gwengamp, a n'em garg da
ober ann holl labouriou brezonnek a vezo digased
d'ezhan, war he goust, pe war gousd ann oberer.

Gwengamp, e ti P. AR GOFFIC, Mouller.